

Bonedoù ruz, trede pazenn



Leurenn sal Langolvaz, e Montroulez, e dibenn ar breujoù gant lod eus ar Bonedoù ruz o kanañ ar Vro gozh.

© Ewen Tallec

Goude an div vanifestadeg vras a oa bet aozet e Kemper hag e Karaez e teue ur goulenn aliesoc'h-aliesañ : daoust ha gouest e vefe al luskad da vezañ un nerzh kinnig ivez ?

abaoc miz Kerzu e oa bet dastumet kaieroù klemm ar Vretoned gant komiteoù lec'hel ar Bonedoù ruz pe dre Internet. Ur 15 000 goulenn bennak a oa bet dastumet evel-se. Emgav a oa bet roet d'an holl d'an 8 a viz Meurzh evit Breujoù meur Breizh e Montroulez.

BERZH EN-DRO

Gant etre 3 000 ha 4 000 den e Montroulez e c'haller lavaret ez eus bet graet berzh gant an trede darvoud meur aozet gant ar Bonedoù ruz. Deuet e oa an dud da glevet penaos e oa bet roet ur stumm d'an holl c'houlennoù bet graet ha war peseurt diazezoù e vefe kendalc'het da labourat. War al leurenn ez eus bet gallet klevet tro-hatro Jean-Marie Roue ha Jean-François Jacob, renerien Brittany Ferries, Claude Keginer ur penn embregerezh, Andreu Lavanant bet prezidant Diwan, Corinne Nicole sindikalourez, Valérie Beskont, gwreg ur pesketaer, hag ivez Romain Pasquier sokiologour, pe Jacques Baguenard eus skol-veur Brest.

Gant labour dielfennañ ar c'haieroù klemm ez eus deuet unnek goulenn bras war wel. Ganto ez eo deuet ar Bonedoù ruz da vezañ un nerzh kinnig da vat.

UNNEK GOULENN PENNAÑ

Pevar goulenn diazez a veze difennet gant ar Bonedoù ruz betek-henn : derc'hel d'an hentoù digoust e Breizh ha dilezel an ekotaos da vat, sikour an implij en ur skañvaat ar c'hargoù hag ar rediennoù melestradurel, ober e stal d'an *dumping* sokial hag adlakaat ar galloud divizout e Breizh.

Resisaet ha pinvidikaet int bet. Setu amañ da-heul an unnek arc'hadur :

- derc'hel d'an hentoù digoust e Breizh ha dilezel an ekotaos da vat,
- frankizañ an energiezhioù hag harpañ an implij dre skañvaat ar c'hargoù hag ar rediennoù melestradurel,
- lakaat un termen d'an *dumping* sokial ha d'ar c'heveziñ direizh en Europa,
- adlec'hiañ an divizoù hag ar galloudoù ekonomikel e Breizh,
- diorren an doareoù treuzdougen nevez hag adkempouezañ an traoù etre ar c'hornôg hag ar reter,
- lakaat ar Vretoned da vezañ mestr war filieren an energiezh ha reiñ lañs d'an energiezhioù nevezadus,
- adlec'hiañ an arc'hant e Breizh,

- ofisielaat ar brezhoneg ha sevenadur Breizh,
- reiñ lañs d'an arnodiñ, d'ar c'hendivizout, d'an dreuzwelusted ha d'ar "bevañ asambles" e Breizh,
- lakaat Breizh da gaout he mediaoù kleweled ha niverel dezhi hec'h-unan,
- Breizh kreñv he femp departamant gant adlec'hiañ an divizoù politikel er vro.

NEVEZAMZER AR BONEDOÙ RUZ ?

Goulenn a ra ar c'hentroll "Bevañ, divizout ha labourat e Breizh" digant François Hollande dont da Vreizh da glevet ar goulennoù-se ha, kement hag ober, embann diarbennoù dirak ar Vretoned. Aozerien devezh Langolvaz a rae anv eus un Nevezamzer ar Bonedoù ruz ma ne vefent ket klevet. Forzh petra a c'hoarvezo ez eus deuet un trec'h c'hoazh ganto.

An holl re a zielefenn ar pezh a c'hoarvez ha betek ar re a gav abeg e poentoù zo (strolladoù zo eus an tu kleiz pe ekologourien, da skouer) a anzav ez eo deuet mat al luskad evit lakaat ar gaoz war dalc'hoù pennañ dazont Breizh ha reiñ c'hoant d'ar Vretoned da gavout diskoulmoù drezo o-unan.